

## Que vous réservent les sentiers de l'édition 2011 ?

### **Circuit court (5,6 km)**

#### Accessible aux personnes en Joëlette et aux poussettes tout terrain

Balade facile et agréable dans la vallée du Quillivaron et la campagne guimilienne. Vous pourrez entre autres vous ressourcer à la Fontaine Saint-Miliau, réputée guérir ulcères et rhumatismes, ou au lavoir de Kerforn, récemment restauré.

En plus de la randonnée : au point de ravitaillement de Kerforn, démonstration de chien de troupeau et animation musicale.

### **Circuit blanc : sur la piste des chevreuils (10 km)**

#### Circuit court mais sportif

Comme un chevreuil, vous parcourrez les flancs de la Vallée de la Penzé, sans crainte des dénivelés ! Vous serez récompensés par la beauté et la sérénité de cet écrin de verdure, qui vous offrira de superbes points de vue sur la vallée et même jusqu'aux crêtes des Monts d'Arrée. Vous y ferez un voyage dans le temps : la grotte de Roc'h Toul, habitée autrefois par nos ancêtres préhistoriques, l'est aujourd'hui par des espèces de faune et de flore en voie de disparition.

Vous y croiserez aussi un lavoir et un calvaire... très étonnant !

En plus de la randonnée : vous saurez tout sur les légendes de Roc'h Toul.

### **Circuit mauve : la route du lin (14 km)**

#### Sans grande difficulté.

A travers champs puis le long de la vallée de la Penzé, ce sentier sans grands dénivelés, jalonné de magnifiques points de vue, vous conduira vers Loc-Eguiner-Saint-Thégonnec, village riche de nombreux trésors (église, fontaines, et motte féodale renfermant un secret), puis vers le Moulin de Keréon où tout vous sera révélé sur la fabrication du papier.

En plus de la randonnée : au moulin de Keréon, démonstration de fabrication de papier de lin, exposition "lin et chanvre".

### **Circuit orange : entre bois et sources (19 km)**

#### Sans grande difficulté

Ce sentier présente une grande variété de paysages et de curiosités : Fontaines aux diverses vertus (parfois étonnantes !), majestueuses allées forestières de Coat-Meur, parc du Centre des missionnaires de Saint-Jacques, balades champêtres, vallée du Quillivaron...

En plus de la randonnée :

- Au point de ravitaillement de Saint-Jacques : artisanat haïtien, concerts dans la chapelle.
- Au point de ravitaillement de Kerforn, démonstration de chien de troupeau et animation musicale.

### **Circuit rouge : le circuit des enclos (23 km)**

Vous contemplez deux des plus célèbres enclos paroissiaux, Guimiliau et Lampaul-Guimiliau, mais aussi de nombreux éléments du petit patrimoine bâti (fontaines, four à pain) et historique (croix du Télégraphe), en foulant de superbes chemins ruraux et en suivant les vallées du Quillivaron et de la Dour Kamm.

En plus de la randonnée : Au point de ravitaillement de Sainte-Anne : démonstration de danses traditionnelles bretonnes en costume.

### **Circuit bleu : le circuit de la Penzé (32 km)**

#### Pour randonneurs confirmés

Vous ne quitterez presque jamais la Vallée de la Penzé, où vous profiterez de la beauté et de la sérénité de cet écrin de verdure, qui vous offrira de superbes points de vue sur la vallée et même jusqu'aux crêtes des Monts d'Arrée.

Vous y croiserez aussi lavoirs, kanndi, pont romain, vestiges en tout genre de la vie des moulins, et un étonnant calvaire...

En plus de la randonnée :

- Visites commentées du Moulin de Herlan
- Point de ravitaillement du Moulin de Trévilis : visite de la roseraie

### **Circuit jaune : vers les montagnes (44 km)**

#### Pour randonneurs confirmés

Cette longue randonnée passant non loin des crêtes des Monts d'Arrée vous mènera par les champs, les bois et les vallées vers de nombreux trésors du patrimoine bâti (manoirs, maisons à apoteis, puits, calvaires, kanndi, chapelles...) et vous offrira de superbes points de vue.

En plus de la randonnée :

- Vous traverserez l'arboretum de Kergrenn

# Petra a gavoc'h war gwenodennoù an Dro Menez Are 2011 ?

## Troiad verr (5,6 km)

### An hini verrañ ! Digor d'an dud e joeledennoù ha d'ar bountelloù treuz bro.

Baleadenn aes ha plijus e traoñienn ar C'hilivaron ha war ar maez tro-dro da Wimilio. Gellout a reoc'h, e-touez traoù all, adpakañ startijenn er feunteun Sant Vilio, brud warni da bareañ ar goulioù-bev hag ar remm, pe c'hoazh e poull-kannañ Kêrforn, bet renevezet n'eus ket pell zo.

Ha war ar marc'had : e lec'h-pourvezañ Kêrforn, diskouezadur chas-tropelladoù ha sonerezh da glevet.

## Troiad wenn : war roudou ar yourc'hed (10 km)

### Troiad berr met diaes a-walc'h

Evel ur yourc'h e valeoc'h, dir war ho tal, a-hed torioù sav-disav traoñienn ar Penze ! Loreet e vo ho kalonegezh gant kaereded ha sederidigezh ar skrin-glasvez-se a ginnig meur a wel kaer war an draoñienn ha betek kribennoù ar menezioù Are. Beajiñ a reoc'h en amzer : mougev Roc'h Toull, a veve hendadoù deomp enni er Ragistor, zo annezet bremañ gant spesadoù loened ha plant war var da vont da get.

War ho hent e kavoc'h ivez ur poull-kannañ hag ur c'halvar... souezhus mat !

Ha war ar marc'had : Pep tra a zeskoc'h diwar-benn mojennoù ar Roc'h Toull.

## Troiad vouk : hent al lin (14 km)

### N'eo ket gwall ziaes

A-dreuz parkoù hag a-hed traoñienn ar Penze ez eoc'h gant ar wenodenn-se hep re a sav-disav, leun a gwelioù kaer. Kas a raio ac'hanoc'h betek Logeginer-Sant-Tegoneg, ur gêriadenn niverus an teñzorioù enni (iliz, feunteunioù ha moudenn feodel dezhi ur sekred kuzh), ha goude-se war-zu Milin Kêreon lec'h ma vo displeget pep tra deoc'h diwar-benn ar fardañ paper.

Ha war ar marc'had : e Milin Kêreon, diskouezadur fardañ paper lin ha diskouezadeg « lin ha kanab ».

## Troiad orañjez : Etre koadoù ha mammennoù (19 km)

### N'eo ket gwall ziaes

Ur skeuliad brav a ardamezioù hag a draoù dedennus a ginnig ar wenodenn-se : feunteunioù dezho galloudoù a bep seurt (souezhus a-wezhioù!), alezioù koadek meurdezus Koad Meur, liorzha kaer kreizenn tadoù misionaer Sant Jakez, baleadennoù war ar maez, traoñienn ar C'hilivaron...

Ha war ar marc'had :

- E lec'h-pourvezañ Sant Jakez : artizanerezh haitiat, sonadegoù er chapel.
- E lec'h-pourvezañ Kêrforn, diskouezadur chas-tropelladoù ha sonerezh da glevet.

## Troiad ruz : toiad an daou gloz-iliz (23 km)

Gellout a reoc'h arvestiñ ouzh daou gloz-iliz eus ar re vrudetañ, hini Gwimilio hag hini Lambaol-Gwimilio, met ivez ouzh meur a elfenn eus ar glad savadurel bihan (feunteunioù, fornioù bara) hag eus ar glad istorel (kroaz an telegraf), ar pep tra-se en ur vale war hentoù kaer war ar maez, oc'h heuliañ traoñiennoù ar C'hilivaron hag an Dour Kamm.

Ha war ar marc'had : E lec'h-pourvezañ Santez Anna : dañsoù breizhek gant dilhad hengounel.

## Troiad c'hlaz : troiad ar Penze (32 km)

### Evit ar valeadenourien arroutet

Penn-da-benn ho hent, koulz lavaret, e chomoc'h e traoñienn ar Penze, lec'h ma tennoc'h ho mad eus kaereded ha sederidigezh ar skrin-glasvezh-se a ginnig meur a wel kaer war an draoñienn ha betek kribennoù ar menezioù Are.

War ho hent e kavoc'h ivez poullou-kannañ, ur c'hanndi, ur pont roman, aspadennoù a bep seurt o testenianñ eus buhez bet ar milinoù, hag ur c'halvar souezhus...

Ha war ar marc'had :

- Gweladennoù heñchet eus milin Herlan
- E lec'h-pourvezañ Milin Treviliz, gweladenn eus ar rozeg.

## Troiad velen : war-zu ar menezioù (44 km)

### Evit ar valeadenourien arroutet

Ar valeadenn hir-se o tremen nepell eus kribennoù ar menezioù Are a gaso ac'hanoc'h a-dreuz parkoù, koadier ha traoñiennoù war-zu teñzorioù niverus eus ar glad savadurel (manerioù, ti gant un apoteiz, puñs, kalvarioù, kanndi, chapelioù...) hag a ginnigo deoc'h gwelioù kaer meurbet.

Ha war ar marc'had : Treuziñ a reoc'h arboretum Kergrenn.